

Dastumad Pennwern : dornskrid 89

55. AR JOUISS KOZ

(follennoù 181-183 ha 185)

Kenta ma his da vit dour
Ne vouien ket em boa amour,

Ken a distrois var va c'his
E voan gwerzet d'ar Souiss.

- Diozoc'h, va mam, e c'houlenan
Pe me zimes, pe me ne ran ?

- Leel, va merc'h, me ne on ket
Dioc'h o tad na goulennet.

Nag ed da goulen dioc'h o tad
A zo er jardrin da ballat.

- Diouzoc'h, va zad, e c'houlenan
Pe me zemes pe me ne ran ?

- El leel, va merc'h, me ne hon ket :
Dioc'h o preur belek goulennet,

A zo duze er kamp ar studi,
Mar fot dec'h goud, id de caet d'hi.

- Diouzoc'h, va breur, a c'houlenan
Pe me zemez pe me ne ran ?

- El leel, va c'hoar, red eo monnet
Rag an arc'hant a zo touchet.

Pevar c'hant skoet en arc'hant gwen
A kement all en aour melen.

- Diouzoc'h, va mam, a houlenan :
Peseurt habidik a guiskan ?

- Guiskit ho habid seiz pluenek
A vezo skan deoc'h da kerzet.

- 150 -

- El leel va mam gwir awoalc'h a leret
Me ne renkin ket a kerzet

Me a vel eur marc'h dibret klos
En pen ar pors doc'h va gortos.

+

- En ti ar C'houis pa erruis
Var an treujo he hasseziz.

Goalc'h va c'halonik a voëlis
Ia, gant keun dam iaouankis

Raz va c'halon em meus goëlet
Gant keun d'am amzer tremenet

Evit goëla ne zistro ket.

C'houi lapoussidigou divar nich
Grit va gourc'hemeno d'am broïis,

Nemert d'al laër, va breur Loïis
En deus va goë(r)zet d'ar Souis
Ia, en despet dam avis.

(Al lodenn-mañ, o kregiñ gant gwerzenn 6 ar :
enn 183, Illedik va dousik koant, betek gwerzenn :
follenn 185, a zo ur c'hontammadur diwar ur werz :
Aotrou Pennarstang moarvat.)

Illedik va dousik koant
Pa zomp om daou daou zen iaouank,

Dem-n'hi bremañ d'ar jardrin
D'ober eur boket louzou fin,

D'ober eur boket tin a levant
A zere deus eur plac'h iaouank.

- Goël e ganen, a klevet mat,
Eur bod burlu deus ti va zad.

- Illedik, va dousik koant,
Pa zomp on daou daou zen iaouank,

Dem-n'hi breman d'ar jardrinou
Da tava 'r per an avalou.

- 151 -

- Goël e ganen, a klevet mad
Eun aval put deus (a) ti va zad.

- Illedik, va dousik koant,
Pa zom on daou daou zen iaouank,

Dem-n'hi breman sellier a sellier
Da tava ar gwin ken douz a mel.

- Goël e ganen, a klevet mad
Eur banne dour ilin a di va zad.

- Illedik, va dousik koant,
Pa om on daou daou den iaouank

Dem-n'hi breman stall a stall
Da choas ar mezer inkarnall.

- Goël e ganin, a klevet mat
Eun tam lien balin deus ti va zad.

- Illedik, va dousik koant,
Pa zom on daou daou den iaouank

Dem-n'hi breman kampr a kampr
Da konta an aour hag an arc'hant.

- Goël e ganin, a klevet mad
Konta ar vein e ti va zad.

(Amañ gant gwerzenn 1 ar follenn 185 ec'h adkavc
Ar Jouiss koz, nemet moarvat ur c'hontammadur adari
gant ar 4-e hag ar 5-vet poz)

Ar Jouiss koz a lavare
de vap hena eun deis a voe :

- Tollomp hi er mor da veuzi
Pa ne domp evit he c'honsoli.

- Evid an dra ze ne rin ket.
De zad de vam em boa prometet
E c'hachen adare do goëlet,

+

Illedik a lavare
En e c'hontre pa n'arrue :

- 152 -

- Debonjour dec'h, Kerlouanis,
Setu me deud adare var va c'his.

En despet dam breur laer Lois
En deus va goe(r)zet d'ar Souiss.
Ia, eb goulen va avis.

Leun va godellou arc'hant gwen
Kement all en aour melen

Eur Jouiss bien em barlen
Eur galonen aour en he kerc'hen:
Goel e ve ganen e ve eur gorden.

v v v v v

Janed Puill, 14 janv. 1851

v v v v v v v v v